

MOUEZ EUR GALOUN VREVET

(Var dôn : Paotret Plouillo)

Kenavo d'id ma c'haredik ,
 Kenavo da virviken ,
 Brevet e teu: ma c'halounik
 Gant ar glac'har , ann anken ;
 Gouskoude ar gwassa 'meuz gret
 A viskoaz en da genver ,
 Eo da veza da re garet
 Gant eur galoun re dener !

Tec'het e teuz evel ma tec'h
 Ar goulm demeuz he neizik
 Heb ma c'hellan gout da belec'h
 Teuz kasset da galounik ;
 Tec'het e teuz , ha 'r pez zo goaz
 Na ouzan ket 'vit petra .
 Rag va dilezet teuz siouaz
 Pa da garan ar muia !

Nag a vuhan teuz dizonjet
 Ann amzeriou ma vije
 Da zaouarnigou flour stardet
 Ken aliez 'barz ma re ,
 Hor zelligou o n'em groaza
 Digant kement a eur-vad ,
 Ha ma skeudennik o para
 Ebarz mabik da lagad .

Da betra dal d'in brema
 Gwelet ann heol o skedi ,
 Klevet ann enved o kana
 Digant kement a zudi ,
 Pa guz ouzin ar sklerijenn
 A bare warnoun eunn de ,
 Pa eo tavat ar ganaouenn
 A vouskane em ene .

Me da vel c'hoaz o tiredek
 Ken evruz d'am diarbenn ,
 Da zivrec'higou karantek
 Tardet en dro d'am c'herc'henn ,
 Ar pokigou o tinijal
 Divar da vuzelligou ,
 Ar garantez o c'huvreal
 E gwelek hor c'halounou .

Petra dal brema da Zoue
 Hada bleun 'leiz ar parkou ,
 Lakat deliou glaz 'barz er gwe
 Disheol dindan ar brankou ;
 Vo mui 'vit-oun war ann douar
 Peoc'h na frealzidigez ,
 Na vo nemet keuz ha glac'har ,
 Poan , rann-galoun hag enkrez !

Lavaret e poa din neuze
 'Spen kant guech elec'h unan
 Ne garjoc'h den nemet oun-me
 Keit ma vit war ar bed-man ,
 Ha me 'kredi da le gwirion
 'Nem westlas ive d'am zro
 D'ho karout a greiz ma c'haloun
 Tre betek eur va maro !

Va holl buhez na vezo mui
 nemet eunn nozvez tenval ,
 Eunn nozvez hir 'pad pehini
 N'em bo netra da c'hedal ,
 Netra da c'hedal , da c'hortoz ,
 'Net da velet c'hoaz eunn de
 'Neur c'hornik deuz ar Baradoz
 E-mesk aeligou Doue .

Mez ar fealdet ne ma ket
 He falez war ann douar
 Nag ar garantez grizienet
 Er c'halounou a n'em gar ;
 Bez euz out-ho evel ma vez
 Demeuz ar c'homzou kaera ,
 Ar re denera aliez
 A dremen ar buhana !

Kenavo 'ta ha pa zeo red ,
 Kenavo c'hoaz , kenavo ;
 En despet d'id te vo bepred
 Ann hini garin ato .
 Te c'hello va nac'h , ha siouaz !
 Va c'hassaat , va disprizout ;
 Eunn dra zo ha n'elfet biskoaz :
 Miret ouzin d'ho karout !

Rag bremaik e vo pevar miz
 Ha kaer 'meuz mont ha donet
 Dre gement lec'h e tremeniz
 Na c'hellan mui da velet ,
 Na glevan mui da vouez sklentin ,
 Da c'hoarzik dous ha seder ,
 Rag tec'het e teus diouzin
 Dre guz hag evel eul laer .

oooooooooooooooooooo

Hervé-Nicolas PENNARUN .
 Né à Landrévarzec , le 27 Février 1871 . ;
 Domestique , puis concierge au Lycée de
 Quimper .
 mort , au lycée , le 13 mai 1919 .
 A écrit des chansons qui ont été imprimées sur
 feuilles volantes . Joseph Ollivier (Catal.) en a
 retrouvé une vingtaine , qui peuvent se classer -

comme la production de la plupart des chanteurs populaires - en :

- chansons d'amour (hommages, plaintes, adieux) : chanson eur miliner yaouank d'e vestrez; ch. nevez savet gant eun den y. d'e vestrez arack mont da zoudard etc..
- satires : ar butun marmouz ; son ar plac'h yaouank koz (45 couplets de 4 v. de 13 pieds)
- chansons d'inspiration religieuse : ar Juzverez convertisset gant he mignon..
- * chansons contre l'ivrognerie : ren ar verenn; Tinik Troc'h-Ialc'h ; Daou vignon braz : ann Ankou hag ann Diaoul oc'h ober an evach kre; beza mezo etc..
- chansons relatant de grandes catastrophes : An Dislounk-tan (St-Pierre Martinique); Dis-truj Lagoubran (poudrière près de Toulon); Guerz an Titanic ; guerz an Hilda..

Signait en général Kolaik P. Ses chansons étaient imprimées à Quimper , 18 , rue des Boucheries (de Kerangal) .

Var don : Paotret Plouillo .

Kenavo d'id ma c'haredik,
Kenavo da virviken,
Brevet e teuz ma c'halounik
Gant ar glac'har, am anken;
Gouskoude ar gwassa 'meuz gret
A viskoaz en da genver,
Eo da veza da re garet
Gant eur galoun re dener!

Tec'het e teuz evel ma tec'h
Ar gouln demuez he neizik
Heb ma c'hellan gout da belec'h
Teuz kasset da galounik;
Tec'het e teuz, ha 'r pez zo goaz
Na ouzan ket 'vit petra.
Rag va dilezet teuz siouaz
Pa da garan ar muia!

Nag a vuhan teuz dizonjet
Ann amzeriou ma vije
Da zaouarnigou flour stardet
Ken aliez 'barz ma re,
Hoz zelligou o n'em groaza
Digant kement a eur-vad,
Ha ma skeudennik o para
Ebarz nabik da lagad.

Da betra dal d'in-me brema
Gwelet am heol o skedi,
Klevet am enved o kana
Digant kement a zudi,
Pa guz ouzin ar sklerijenn
A bare warnoun eum de,
Pa eo tavet ar ganaouenn
A vouskane em ene.

Me da vel c'hoaz o tiredek
Ken evruz diarbenn,
Da zivrec'higou karantek
Stardet en dro d'am c'herc'henn,
Ar pokigou o tinijal
Divar da vuzelligou,
Ar garantez o c'huvreal
E gwelek hor c'halounou.

Patra dal brema da Zoue
Hada bleun 'leiz ar parkou,
Lakat deliou glac'barz ar gwe
Disheol dindan ar brankou;
Vo mui 'vit-oun war ann douar
Peoc'h na frealzidigez,
Na vo nemet keuz ha glac'har,
Poan, ram-galoun hag enkreiz!

Lavaret e poa din neuze
'Spen kant guech elec'h unan
Ne garjoc'h den nemet oum-me
Keit ma vit war ar bed-man,
Ha me 'kredi da le gwirion
'Nem westlas ive d'am zro
D'ho karout a greiz ma c'haloun
Tre betek eur ma maro!

Kenavo 'ta ha pa zeo red,
Kenavo c'hoaz, kenavo;
En despet d'id te vo bepred
Ann hini garin ato.
Te c'hello va nac'h, ha siouaz!
Va c'hassaat, va disprizout;
Eum dra zo ha n'elfet biskoaz:
Miret ouzin d'ho harout!

Mez ar fealdet ne ma ket
He falez war ann douar
Nag ar garantez griziennet
Er c'halounou a n'em gar;
Bez euz out-ho evel ma vez
Demeuz ar c'homzou kaera
Ar re denera aliez
A dremen ar buhana!

H. PENNARUN
Kemper, moulet e ti De Kerangal.

(sur la même feuille volante :
AR BUTUN MARMOUZ, var ann ton a garer
BEZA MEZO, var ton nevez.)

Rag bremaik e vo pevar miz
Ha kaer 'meuz ha donet
Dre gement lec'h e tremeneiz
Na c'hellan mui da velet,
Ha glevan mui da vouez sklentin,
Da c'hoarzik dous ha seder,
Rag tec'het e teuz diouzin
Dre guz hag evel eul laer.

Je ne puis aller de mieux

Handwritten notes:
... sans que je n'aie été
... ce n'est pas pour rien
... a quoi me sert ce travail
... un peu de gloire
... de ce côté de la lune
... quand il est venu le dimanche
... qui chantait de son air

Handwritten notes:
... lui y aura plus four
... pour ce candidat
... tant me sera
... sans plus qu'
... un peu de gloire
... un peu de gloire
... un peu de gloire
... un peu de gloire

Handwritten notes:
... au lycée de Kemper.
1921-1922